

Discours
Da lavaret e qichen an ty d'eur Goulen.

(242, suite)

Salud deoc'h, tud a enor, gant peb sort soumission,
Tud a bep galite hag a bep sort condition;
Ho ty hag ho madou, hag ho tometiqet,
Hag ho polonté vad o deus va c'hontraignet.
Larat allan hardi ne voan get bet biscoas
Gant qement a blijadur e c'hantrey en eur plas.
Ho ty a so stituet, gen toen ha murail,
Eur plas eus a blijadur, ne neo get eur marvail.

(243)

An neb en deus compozet ar portret deus ho ty,
A zo euz den a speret; ne fell get diñ doueti.
Ne eller get, va mignon, dont da bea erfat
Euz habil architect, ma n'en deus da labourat.
Ne zo bet o vale en cals eus a vroyou,
Hag emeus goneet nombr bras a victorien;
Mes hor Talner benig'et a zo marvet er groas,
Hercoultz d'it ar pinvig vel vit ar paour, siouas!
Euz amitie sinser erzeo va herverdi,
Eur femeler, yaouanq zo mag'et en ho ty,
Zo vit euz den, yaouanq a zo eus va c'hanton;
Ne get bet sur eul lach, infidel ha poeltron,
A zo deut hirye m' de d'e assignation.

E hano brema ne livirin,
Mes men en lavaro gentoc'h ma finissin.
Prest on da finissa hag ive da gomans,
Ma parlantan davantach, me am bezo setans.
N'estiman eur procuror o tifey e gojou,
Ma ne c'hone e broces ha diouté ar gaou;
Rac mar qezvan me c'hoaz teir goech en odians,
En durant, m'er selaoui, me am bezo setans;
Rac Roue absolu on, m'ar qerit va c'hredi,
Pa c'houlan va herverdi, e renqit e rei din.

(244)

x

Me eo ar Roue Artur, puisans souveren,
Breiz-Izel en antier zo dindan va c'hourc'hemen;
Ja, en asurans, Roue ar Vretonet,
Hag Otron en Breiz-Izel d'ar Noblans ha Prinset.

Da g'enta, vit comans: Brest zo din en antier,
Montroulez ha Lanneur, Lannion, Landreg'er,
T... en antier, bete quelet Leon,
Castel-Lin, Forz-Loué, ar C'hroazic hag Crozon,
Ar Faouet ha Sant-Nic, Cast, Moelan, Poulaoen,
Ha Gimper-Corentin, Castel-Pol, Lesneven;
Plestin, Garlan, Plouyan, Langonaval, Guimec,
Lomiquel, Plouezoc'h, Plougatnou, Sant-Briec,
Guerlesquin ha Benac'h, Callac ha Ger-ches,
Plourin, Sant-Yan-ar-Bis, Roscof, Plouneour-Menez.
(245) Hag ar g'er a Roazon, elec'h ma chom bepret
Parlamant Breiz-Izel, hag ho prezidantet,
Geriti ha Girias, Peros ha Lanvelec,
Plouigno, Botsorhel, Tole ha Carantec,
Lambal ha Sant-Malo, Dinan, Sant-Thegonec,
Pleiber-Christ, Comanna, Plougonven, Logirec,
Pontreo, Plufur, Sant-Sé, Gouarnalgin, Pontmenou,
Kerneu'gen, Enez-Vaz, Callot, hag ar Pontou,
Plouescat, Plouizi, ha Castel-an-Taro,
Hag ar blasen superb a ra dezhan ar dro,
Coatrevan, Pedernec, Pempol, Plegat-Guerand,
Hag enfin, gement so dindan ar firmamant.
Arca ta Mac'h-Yaouanq, va quin fried fidel,
Setu c'houi Rouanez ebarz en Breiz-Izel;
Setu c'houi Rouanez va'r c'heryou meus hanvet:
Bezit eta contant eus ar fortun a ret.

Goulen.

(246) G. Tu poza, supoza, sponta, in quelea,
Goudea conjongo, vita multiplia.
Gement-ma zo tennet, m'oc'h assur, mignonet,
Eus an naonet chabist a greasion ar bed.
Pa voan-me deut en deñma deus ar g'er,
Me a voa tristoc'h calz evit ma voe Sant Per,
Pa nac'has e Vestr mat goechal en ty Pilat,

204

Rac gant eur plac'hig coant e voa o vabillat;
 Gant ma voan deut en hent me voa ey em vrestlet
 D'ar zant bras Guignole, mignon bras d'ar merc'het,
 D'am sant paeron ha d'am santey maerones,
 Evit goulen ar c'hras da c'houit va proces.
 Me ya da retardi bremen va c'homplimant,
 Va mignon qer, evit clêvet ho santimant.

Genta couples.

R. Neus fors absolutant,
 Red eo da eur den parlant;
 Ma ne respontomp get an dud,
 E teufont da lavaret e vemp mud.
 Sonjet on eus da ober vael,
 Sevel aman eur zantinel,
 Hag a vo grêt en form eur ty,
 Evit respont an dremenedi.
 Ha c'houi, va mignon qer,
 M'ar oc'h eus marc'hadourez,
 Pe da brema, pe da voerza,
 Partiet gante da genta,
 Evit Montroulez pe Gastel,
 Hag ho p'o profit n'o get pel;
 Eno e qefot honestamant,
 Peadra evit hoc'h arc'hañt.

(247)

2.

G. C'houi a zo er philozofi,
 A zo grêt ganec'h ho studi,
 Hag a zo imposubl dec'h mangout;
 Mes me zo ignorant, ne ouñ netra entout,
 Nemet debri va yod, ha lipouzañ va lez,
 Debri cals patatez, ha bep sadorn crampoez,
 D'ar zul vintin stripou, d'a greis-de va zouben;
 Mes en eur gonta deoc'h darn eus va zalanchou,
 Ne zonchan get penos ec'hacoian va rimou.

(248)

3.

R. Me voa bet en eur varigen,
 A voa talet en e zaou ben,
 Hag e teus er miz dre doull ar bont,

Mes nao mis just evoen o clasq dont.

4.

G. Debonjour d'éc'h, tied a honor, p'ini
 Zo deut a galon vad da g'icheñic ho ty,
 Gant eur joa vras d'o saludi breman,
 A greis calon ni a zo deut amañ.
 Saludi reomp ractal ho personach,
 Ar respet a gomand ho pizach;
 Hag etretant oc'h oll gompagnuneg,
 Rac sur tied vras oc'h amañ asambles.

5.

(249) R. Pa o quelan ger coantiq rasamblet,
 Ger propr, ger bras, evel ma zoc'h quisqet,
 E sonjan din eve eun eured ve
 An nombr a dud zo en oc'h asamble.

6.

G. Me fot din breman, va mignon,
 Gout eus a betra eo qestion;
 Rac ma velan eur sort banden,
 Eru da doul va dor d'am surpren.

7.

(250) R. N'en deo get evit o surpren,
 Nag evit ober froañ da zen,
 Ezomp amañ n'eum assamblet
 Vel ma ve eur vanden denved.
 Ni a zo e clasq da eurenji,
 Ha na ellet get da ziferi;
 Rac dindan boañ da baec an amand,
 Hag ar mijou antieramant,
 Eun ouades an boa tennet;
 Erwe ma zê demp raportet,
 Disqennet erzo en ho ty,
 Rac-se rentit-y deomp-ni:
 C'houi a renq rentā demp rêzon,
 Anezji, va mignon.

8.

G. Pa o clêvan, va mignon, a greñ,

206

E sas va bleo ebars em peñ,
 Pa gomzjit din eus a ovidi,
 Rac en ty - ma n'en deus hini.
 Evit ezac'h, grag'ez ha merget,
 Ar re-se ne lavaran get;
 Mes abars m'o po eus an ty - may eur plac'h,
 C'houi a renqfe e goulen yac'h.

9.

R. Ni zo e clasq eur plac'h - yaouanq,
 Mar qirit e henvel dec'h fresqamant:
 E hano eo Guillemet ar Maout,
 Nag evit beza pried da Charles ar Jarout.
 Da zont d'an iliz da eureuzi,
 Da echui an demerzi.
 Guillemet ne vouie get
 E voa hiruz deiz e heuret,
 Hag a zo et d'ar velin da oza qerc'h,
 Rac-se, reit, mar qirit, var e lerc'h.
 Rac ar Meliner a voar parlant,
 Hag a ambus ar merc'h et yaouanq.
 Aon emeus na ranqac'h reir e gortoz,
 Abars ma c'heruo e vo noz.

(251)

10.

G. M'am be ar bermission
 Da antren en ho ty, va mignon,
 Me gafe pront, eb' diferi,
 E peñ ho töl va hervridi.
 Pa voan aru e peñ ar harz,
 Me e hanevas eus e c'hoariz,
 Hag e c'hlevis o lavaret:
 Eru e davidon va mujan caret.

11.

R. P'oz eus o goelet o tont da dal va zy,
 Me zanje din voac'h eur vanden mendaedi,
 O vont da vrest evit eur ambarqamant,
 Pe zoudardez o clasq o lojamant;
 Pe otramant eur vanden stouperuzen,
 Eus a Scrignac, Loqefret pe Berduzen.

(252)

12.

G. Si clamabor et meditabor ut colimba;
 Evelse e comzân pa ven o latina.
 E nan Doue non retardit get,
 Rac ar bêleg a zo presset;
 Me zonch din eo eus a urz Sant Oripin,
 Hag e car dijuni mintin.

13.

R. Qer brao, qer coant ha ma oc'h eus comzet,
 Va mignon qer, o refusi n'allân get;
 Me a ya da ober eun dro dre va zi,
 Da c'hout ha me gavo dec'h ho qervidi;
 Ha pa rin-me eun droic var ma seul,
 E tevon eun dra benac d'am heul.

(253)

14.

G. Setu amân eur vaouez coant,
 Ha ne des na cöz, na yaouanq,
 A gle ravissa ho speret,
 Gant e fresans hag e g'enet.

15.

R. Ar vaouez-se zo perlenet,
 Emedi al liou var e beg;
 Hag e deus bet choazet e far,
 Na ne ra forz piou zo var var.
 Me a gred e deus dija poazet
 Eus an darbot e biziet;
 Gaset-i ganec'h var e c'his,
 Rac aon na defe droug-aries.

16.

G. Terrupl, meurbet oc'h difetil;
 Va mignon, ho complimanchou zo sivil.

17.

R. Setu amân eur plac'h yaouanq,
 Hag e deus eur galon ardant,
 Hag a dle plijout d'o fantazi,
 Pe oc'h dies da gontanti.

(254)

18.

G. Ni on eussi d'igemeret,
 Ha neo get da verza refusjet;
 Pa vo erru an heur, mar qar,
 Ni zo prest da choaz dei e far.
 Mes em all a c'houlennomp c'hoas,
 Hag a zo blesset en e scoas,
 E zerricher qercouls hag hi,
 Erru eo ar poent da repani.

19.

R. O prezanti d'ec'h an objet
 P'ini oc'h eus dija goulennet,
 Auspen, ni a c'houlenn pardon
 Mar on eus bet divizion.

Didostait-ta, den a zeverz,
 Da zig'emeret ho mestrez,
 Ni er ro d'ec'h a galon vad,
 Gant conje e mam hag e zad;
 Conje e c'herent hag e lignez,
 Da antren ganec'h en priadelez.

Pedit Jesus, Roue an Tron,
 Da rei d'ec'h e venediction,
 Ha d'oc'h asista evel ma eure
 En eured Cana en Galilee.

Conduet eur vuez vat,
 E doujanç Doue erve ho stat;
 Ha goude monet da repos,
 Gant an delez d'ar Barados.

fin.

(Vol. II, p. 242-255.)

(255)